

- 55 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

104. PENEREZ KEROULLAS

(follennoù 48-52)

Ar benerez a Keroullas
 A zo eur c'hodisserez vras
 Ed deus goudisset Kerssimon
 Drawca digentil a zo e Leon
 Ag an otrou Kersalaun.

Ar benerez a c'houlenne
 Deus e mam itron ag an de se :
 - Ma mam itron, ma nam c'heret
 Ag er bla man va dimezet
 Da Kerthomas pe d'ar C'hoadlez
 Petrament dar varkis Kergroadez
 Rag mar deu markis Mel aman
 Me zo sur e renkin mond gantan.

- Allas, va merc'h, minores oc'h
 Ne allan ked dispos ahanoc'h.
 Nag o kerent a beurs o tad
 Ne gueront ked nemeur o mad
 Hag a garfe vec'h ed a pel
 Evid deus o tanvez beza vel.

Eur sam gwini pem kant a seiz
 A meus, va mam, a weled breiz,
 A me o c'harffe oll kollet
 A me gant Kerthomas e kousket.
 - Allas, va merc'h, minores oc'h
 Ne allin ked dispos ahanoc'h.
 Nag o kerent a beurs o tad
 Ne geront ked nemeur o mad
 Ag a garffe vec'h ed a pel
 'Vid deus o tanvez beza vel.

Ar benerez a lavare
 D'he flac'h a gamb an deiz-se :
 - Lass-te goustat va c'horset
 Rag va c'halon ne ass ket;
 Va halon a zo simpl a fall
 (h)e vond da itron d'ar c'hastel Gall
 a da kalz a vaneriu all.

- 56 -

Ar benerez a houlenne
 Doc'h e plac'h a gamb ag an de-se:
 Petra zo a nevez en ti man ?
 Krena ra ar pave dindanan
 - Nan deo markis Mel var he ganvet
 Erru, va mestrez, d'ho koëlet.

Ar benerez evel ma klevas
 Dan alle c'hlas prompt e retornas.
 D'an alle c'hlas e retornet
 Kerthomas en deus rencontret :
 - Kerthomas no c'heus ket gred mat
 Dont dam goëlet var ho daou troad
 Mar boa ronsat e ti o tad.

- Me a meus eun inkane vian
 A zo gwarnisset a leton
 E dib gwarnisset a berlez
 Kapab d'ho tougen, penerez.

Na markis Mel a lavare
 En Kercoullas pa n'arrie :
 - Debonjour a joe ebars an ti man,
 Ar benerez, pa ne vellan ?
 E mam itron a respontas
 Da varkis Mel pa he c'hlevas :
 - Ed o zitti dan ale glas
 Gati an otrou Kerthomas.
 E medi gati e soued
 E muia karet var ar bed.

Na markis Mel evel ma klevas
 D'an alle c'hlas e retornas,
 D'an alle c'hlas eo retornet;
 Ar benerez en deus rankontret
 - Debonjour deoc'h pennerez,
 Setu me deuet d'ober al lez,
 Do goulen digant o mam a gwir berhen.

Ar penerez a lavare
 Da varkis Mel nag an de se :
 - Ar voulos ag ar satin glas
 A zoug an otrou Kerthomas,
 Luia a ra dirag va dremm ° = dremm
 Memez tra evel eur stereden.

Na markis Mel evel me klevas
 Dar benerez a respontas :

- 57 -

- A biou Kerdomas me zo deuet.
 Mar dall er vad ne meus goëlet
 Nemed eur gos sall mogedet
 E c'hober ti d'ar c'haöenet.

Na ar benerez a lavare
 Da varkis Mel pa en c'hleve :
 - E Kerdomas eus eur sal nevez
 Kapab da zigomeret eur roue
 A na ve pem kant den doc'h a ne.

Na Kerdomas a lavare o drailla foën d'ho kabonet
 D'ar varkis Mel ag an deis se : M'ho dije kerc'h ne rechen
 - Pa ia ganez va faltazi ket.
 Ro dime da c'hoar Mari.

Na markis Mel a respontas
 Da gerdomas pa e c'hlevas :
 - Va c'hoar Mari te ne po ket
 Da vadou te ne demel ked.

Ar benerez a respontas
 D'ar varkis Mel pa e c'hlevas :
 - O c'hoar Mari en devezo
 Triwarc'h mil skoët en aour goulo° °= argouroù
 Ag ar maner evito o daou.

Ar markis Mel a respontas
 Dar benerez pa he c'hlevas :
 - Penerez glorius a zoc'h
 An oll e voar avad e zoc'h.
 Ar verc'h enan a veur a di
 Penerez a zo koulz a c'houi.

- Kris e vije ar galon na voëlche
 Ebars en Keroullas an eb a vije
 E klevet ar beorien e voëlla
 Doc'h ar benerez e kimiada.
 - Adieu, penerez, or bouet;
 Adieu ar buez astennet.

- Tewid, peorien, na welit ked
 Deud d'ar c'hastell gall d'am goëlet.
 Kent me roë allusen beb tri de
 A breman me a roio bemdez.

Na markis Mel a respontas
 Dar benerez pa e c'hlevas :
 - Ma roit charite bemdez
 Ne pado ket pell on danvez.

- 58 -

- Hiroc'h e pado va danvez
Evid nem c'heffod en buhez.

vvvvvvvvvv

Mari Pozeg, kemenerez en Taole, 18 fevr. 1851

vvvvvvvvvvvv